

Sinema e brezhoneg



**Teuliad bilañs an 13vet troiad filmoù-bevaat e brezhoneg
e Breizh hag e Pariz**
Genver-Even 2015

Daoulagad Breizh

13 straed Michel Le Nobletz BP 206
29172 DOUARNENEZ Cedex
02 98 92 97 23
daoulagad.bzh@orange.fr
www.daoulagad-breizh.org

Ar Filmoù

Evit ar c'helc'hiadoù 1 & 2:

Beaj vat Dimitri !

Filmoù-bevaat / Frañs - Rusia / 40 mun

Pedet oc'h da veajiñ ho taoulagad digor frank !

Kaset voc'h da bell-vro gant istorioù tener, renet dreist-holl gant loened dudius ! Deuit d'o heul diouzh red fabloù o bedoù faltazius...



Djinn ar voest ravioli / Claude Barras / 7mn35



Snejinka, fulenn erc'h / Natalia Chernysheva / 6mn



Dimitri e Ubuyu / Amandine Lecreux ha Fabien Drouet / 26mn

Beajiñ o deus bet tro ar skolidi hag o skolaerien ober dre ar programm-mañ, etre plaenenoù Afrika hag ar bed faltazi brav ha seder. Daoust da vezañ bet kavet brav ar skeudennoù, lod anezho o deus bet kavet diaes an istorioù da gompren.

Evit ar c'helc'hiad 3:

Ernest ha Celestine

Film-bevaat / Frañs-Beljik-Luksembourg / 2012 / 1 eurvezh 19

Skignañ : StudioCanal

Senario ha divizoù : Daniel Pennac



E bed boutin an arzhed, e vez brud fall war an nen a gustum kamaradiñ gant al logod. Koulskoude e vo degemeret unan anezho gant Ernest, un arzh tev war ar riblenn, furlukin ha soner ma'z eo : Celestine vihan eo, un emzivadez he deus tec'het kuit rak bed dindanzouar ar grignerien. An daou unan en e-unan-se a skoazello hag a frealzo unan egile, war var treboulañ ar c'hizioù diazezet.

Diwar levrioù Gabrielle Vincent ez eo bet savet ar film-bevaat-mañ. Dre ijinañ bed **Ernest ha Celestine** er bloavezhioù 80, he deus Gabrielle Vincent, aozerez ha skeudennerez anezhi, profet he ijin konterez ha treserez d'an holl vugale. Kement a berzh n'eus graet ar film-bevaat dirak ar vugale hag ar skolaerien, e galleg daou vloaz zo hag e brezhoneg ar bloaz-mañ. Fromet int bet gant an istor, a lak ar gaoz war an arzoù, ar mignoniezh, an disheñvelerioù, kodoù ar gevredigezh, an doujañs ...

An aozadur

Abaoe miz Gwengolo 2005, pa oa bet sinet ar c'hendivizad nevez gant Dizale, e ra Daoulagad Breizh war-dro skignañ ar filmoù ha kenurzhañ an abadennoù. Dibaoe dek vloaz e vez graet ha skignet an dafar kehentiñ (ar skritelloù, ar fichenoù war ar filmoù hag an doser evit ar skolaerien) gant Daoulagad Breizh. Gant Dizale e vez roet an eilennoù (DCP ha DVD).

Fakturrenet e vez ur priz ingal da bep bugel : 2,50 euro.

Hervez al lec'h e vez aozet an abadennoù gant kevredigezhioù lec'hel pe gant Daoulagad Breizh war-eeun. War ziorren ez a ar rouedad skignañ abaoe deroù an droiad. Strivañ a ra Daoulagad Breizh hag he c'henlabourerien evit kavout lec'hioù nevez ha plijus evit kinnig d'ar vugale un abadenn a galite.

Hor c'henlabourerien :

E Aodoù-an-Arvor : Ti ar Vro Treger Goueloù

E Penn-ar-Bed : Brezhoneg e Plouzane, KLT, Ti ar vro Bro Leon, Ti ar vro Kemper, Ti ar vro Kemperle, Ti ar vro Landerne-Daoulas, Sked, Ti-kêr Karaez

E Il-ha-Gwilen : Skeudenn Bro Roazhon

El Liger-Atlantel : Ajañs sevenadurel Breizhek Liger-Atlantel Morvan Lebesque

Er Mor-bihan : Divyezha Sant-Teve, Emglev Bro an Oriant, Kreizenn sevenadurel Hermine e Sarzav, Les artisans filmeurs associés, Ti douar Alre

Ambrouget e vez pep abadenn, gant un den ezel deus ar gevredigezh lec'hel, Daoulagad Breizh pe Dizale. Degemeret e vez ar skolidi ha kinniget e vez ar filmoù e brezhoneg atav.

Gant ma vez deus ur sinema war al lec'h e klaskomp aozañ an abadenn di. E-mod all e vez feurmet kreizennoù sevenadurel pe salioù plijus, dafar skignañ enne (luc'hvanner video). Pa n'eus ket deus an dafar e feurmomp anezhañ. Klask a reomp kement ha ma c'heller aozañ an abadennoù sinema er-maez deus ar skol. E lec'hioù zo avat n'eus ket tu ober mod all eget aozañ an abadenn e-diabarzh ar skol.



Bilañs hollek gant sifroù

An arvesterien :

10 974 mont e-barzh e pep lec'h e Breizh hag e Pariz
(**771** ouzhpenn e-keñver 2014)

10 928 skoliad (+828)
46 arvester all (+ 17)
24 kentelioù noz (War-sav ...)
6 studier (Kelenn)
16 arvester all

5 464 mont e-barzh evit Beaj vat Dimitri! (+121)
5 510 mont e-barzh evit Ernest ha Celestine (+650)

83 lec'h skignañ

(7 lec'h ouzhpenn e-keñver 2014)

32 sinema gant dafar video niverel (-2),
34 sal gant dafar (+10),
5 sal hep dafar (-1),
5 skol gant dafar (=),
7 skol hep dafar (=)

159 abadenn-skol

(11 ouzhpenn e-keñver 2014)

82 eus Beaj vat Dimitri !
77 eus Ernest ha Celestine

196 skol-vamm, kentañ-derez

(19 ouzhpenn e-keñver 2014),

skolioù publik divyezhek
skolioù katolik divyezhek
skolioù Diwan

Kresket eo an niver a mont e-barzh ar bloaz-mañ, o tremen deus **10 203 e 2014** da **10 974 e 2015**.

Warlene hon oa merzhet e oa un digresk a skolajoù o kemer perzh, pa vezomp o kin-nig abadennoù ispisial evito gant filmoù faltazi e brezhoneg. Un nebeut «arvester all» o deus kemeret perzh ar bloaz-mañ ivez.


Kenderc'hel a reomp mont war-zu ar salioù sinema pa vez kavet. Saliou gant dafar a-feson a vez kavet ivez, ha prest da zegemer ar vugale, alies mat d'ur priz marc'had-matoc'h.

Bilañs hollek - emroadur


| | 2005 | 2006 | 2007 | 2008 | 2009 | 2010 | 2011 | 2012 | 2013 | 2014 | 2015 |
|------------------|------|------|------|------|------|------|------|------|-------|-------|-------|
| Arvesterien | 3097 | 5257 | 6505 | 6520 | 7736 | 8228 | 8705 | 9272 | 10304 | 10203 | 10974 |
| Skolioù | 65 | 97 | 121 | 120 | 149 | 151 | 154 | 160 | 176 | 179 | 196 |
| Abadennoù ? | | 49 | 91 | 101 | 127 | 135 | 138 | 140 | 147 | 148 | 159 |
| Lec'hioù skignañ | 28 | 34 | 45 | 49 | 61 | 67 | 69 | 70 | 77 | 76 | 83 |

Troiad filmoù-bevaat

Emroadur an niver a arvesterien etre 2004 - 2015




Troiad filmoù-bevaat



Bilans an droiad dre departamant

| | Aodoù-an-Arvor | Penn-ar-Bed | Il-ha-Gwilen | Liger-Atlantel | Mor-bihan | Pariz | Hollad |
|---|----------------|-------------|--------------|----------------|-------------|-----------|--------------|
| An holl arvesterien | 1634 | 4862 | 953 | 485 | 3012 | 28 | 10974 |
| Arvesterien ouzhpenn e-keñver 2014 | 259 | 269 | 34 | -21 | 229 | 1 | 771 |
| Skolidi skolioù-mamm, kentañ-derez | 1634 | 4836 | 953 | 481 | 3012 | 12 | 10928 |
| Skolidi ouzhpenn e-keñver 2014 | 259 | 346 | 34 | -25 | 229 | -15 | 828 |
| Skolajidi ha liseidi | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 |
| Skolajidi ha liseidi ouzhpenn e-keñver 2014 | 0 | -40 | 0 | 0 | 0 | 0 | -40 |
| Arvesterien all | 0 | 26 | 0 | 4 | 0 | 16 | 46 |
| Arvesterien all e-keñver 2014 | 0 | 12 | -15 | 4 | 0 | 16 | 17 |
| Skolioù en holl | 30 | 85 | 15 | 8 | 57 | 1 | 196 |
| Skolioù mamm ha kentañ-derez | 30 | 85 | 15 | 8 | 57 | 1 | 196 |
| Skolioù mamm ha kentañ-derez ouzhpenn e-keñver 2014 | 4 | 10 | 1 | 1 | 3 | 0 | 19 |
| Skolajoù/liseoù | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 | 0 |
| Skolajoù/liseoù ouzhpenn e-keñver 2013 | 0 | -2 | 0 | 0 | 0 | 0 | -3 |
| Lec'hioù skignañ | 18 | 30 | 6 | 2 | 25 | 2 | 83 |

Troiad filmoù-bevaat e brezhoneg 2014 - 2015



An droiad dre departamant ha dre c'her gant sifroù

| dep | Ker | Aozer | Lec'h skignañ | Niver a skolioù | Niver a arvesterien |
|-----|---------------------|----------------------------|-----------------------|-----------------|---------------------|
| 22 | Kallag | Daoulagad | Sinema Argoat | 2 | 48 |
| 22 | Plouha | Daoulagad | L'Hermine | 2 | 77 |
| 22 | Sant-Brieg | Daoulagad | Sinema Club 6 | 2 | 136 |
| 22 | Perwenan | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 37 |
| 22 | Bourvriag | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 18 |
| 22 | Bear | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 100 |
| 22 | Pempoull | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 2 | 73 |
| 22 | Lannuon | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Lise Feliks An Danteg | 3 | 316 |
| 22 | Louargat | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 54 |
| 22 | Plounevez Moedec | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Sal ar Gouelioù | 2 | 85 |
| 22 | Pabu | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 90 |
| 22 | Dinan | Daoulagad | Sal Robert Schuman | 1 | 103 |
| 22 | Rostren | Daoulagad | Ciné Breizh | 4 | 180 |
| 22 | Louaneg | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 29 |
| 22 | Landreger | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 28 |
| 22 | Kawan | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Er skol | 1 | 95 |
| 22 | Gwengamp | Ti ar Vro Treger-Gouelo | UCO | 2 | 105 |
| 22 | Plistin | Ti ar Vro Treger-Gouelo | Sinema Le Douron | 2 | 60 |
| 29 | Ploueskad | KLT | Sinema Le Dauphin | 1 | 42 |
| 29 | Tregon | Daoulagad | Ar Sterenn | 1 | 35 |
| 29 | Ar Gelvenneg | Daoulagad | Ar Malamok | 1 | 95 |
| 29 | Kraoñv | Daoulagad | Sinema Rex | 1 | 28 |
| 29 | Lesneven | Ti ar Vro Bro Leon | Sinema Even | 3 | 227 |
| 29 | Gwitalmeze | Ti ar Vro Bro Leon | Sal Arcadie | 2 | 119 |

| dep | Ker | Aozer | Lec'h skignañ | Niver a skolioù | Niver a arvesterien |
|-----|-----------------------|-------------------------|---|-----------------|---------------------|
| 29 | Plozeved | Daoulagad | Sal Avel-Dro | 1 | 60 |
| 29 | Kemperle | Ti ar vro Kemperle | Sinema La Bobine | 10 | 406 |
| 29 | Brest | Daoulagad | Sinema Ar Studioioù | 9 | 611 |
| 29 | Plougastell | Sked | Sinema L'Image | 5 | 355 |
| 29 | Konkerne | Daoulagad | Cinéville | 3 | 105 |
| 29 | Kemper | Ti ar vro Kemper | Cinéville | 6 | 411 |
| 29 | Lokorn | Sked | Sinema Le Bretagne | 5 | 312 |
| 29 | Brieg | Ti ar vro Kemper | Arthémuse | 3 | 183 |
| 29 | Plouguerne | Daoulagad | Mediaoueg | 1 | 90 |
| 29 | Lokmaria- Plouzane | Daoulagad | Sal Ti Lanveneg | 1 | 18 |
| 29 | Plouzane | Daoulagad | Kreizenn sevenadurel François Mitterrand | 1 | 87 |
| 29 | Karaez | Daoulagad | Ar gazeg c'hlaz | 6 | 235 |
| 29 | Kastellin | Daoulagad | Sinema Agora | 2 | 57 |
| 29 | Pont'n Abad | Daoulagad | Skolaj | 1 | 53 |
| 29 | Montroulez | KLT | Sinema La Salamandre | 6 | 225 |
| 29 | Landerne | Ti ar Vro Bro Leon | Sinema Le Rohan | 3 | 261 |
| 29 | Plabenneg | Ti ar Vro Bro Leon | Kelc'hva ar skolaj | 2 | 125 |
| 29 | Douarnenez | Daoulagad | Sinema Le Club | 2 | 147 |
| 29 | Lanniliz | Daoulagad | Sal Yves Nicolas | 2 | 230 |
| 29 | Lanneur | KLT | Sal Steredenn | 1 | 74 |
| 29 | Landivizio | KLT | Sal Tournemine | 1 | 12 |
| 29 | Sant-Riwall | KLT | Sal ar Gouelioù | 1 | 41 |
| 29 | Kastell-Paol | KLT | Sinema Majestic | 2 | 117 |
| 29 | Klerder | KLT | Sal Kan ar Mor | 2 | 75 |
| 35 | Redon | Daoulagad | Sinema Manivell | 3 | 160 |
| 35 | Ar Felger | Daoulagad | Mediaoueg La Clairière | 1 | 24 |
| 35 | Roazhon | Skeudenn bro Roazhon | Maezioù Frank (Dimitri) ha Sinema TNB (Ernest) | 8 | 642 |
| 35 | Kastell-Bourc'h | Daoulagad | Etoile Sinema | 1 | 27 |
| 35 | Gwitreg | Daoulagad | Aurore Sinema | 1 | 80 |
| 35 | Sant-Maloù | Daoulagad | Kreizenn Allende | 1 | 20 |
| 44 | Sant-Nazer | Daoulagad | Ti ar Re Gozh | 2 | 44 |
| 44 | Naoned | ACB44 | Sinema Le Katorza | 6 | 437 |
| 56 | Josilin | Daoulagad | Sinema Le Beaumanoir | 2 | 102 |
| 56 | Gwened | Daoulagad | Cinéville | 9 | 596 |

| dep | Ker | Aozer | Lec'h skignañ | Niver a skolioù | Niver a arvesterien |
|-----|-------------|----------------------|---------------------|-----------------|---------------------|
| 56 | Pont-Skorf | Emglev Bro an Oriant | Le Strapontin | 2 | 54 |
| 56 | Rianteg | Emglev Bro an Oriant | Er skol | 1 | 53 |
| 56 | An Oriant | Emglev Bro an Oriant | Mediaoueg | 1 | 91 |
| 56 | Kewenn | Emglev Bro an Oriant | Mediaoueg | 1 | 24 |
| 56 | Pondi | Daoulagad | Ciné Rex | 3 | 101 |
| 56 | Baod | Daoulagad | Sinema Le Celtique | 2 | 102 |
| 56 | Pleuwigner | Daoulagad | Sal ar Madeleine | 2 | 135 |
| 56 | Sarzhav | Daoulagad | L'Hermine | 2 | 101 |
| 56 | Lanarster | Emglev Bro an Oriant | Mediaoueg Tam-Tam | 2 | 73 |
| 56 | An Alre | Daoulagad | Sinema Les Arcades | 7 | 373 |
| 56 | An Oriant | Emglev Bro an Oriant | Mediaoueg | 1 | 89 |
| 56 | Sant-Teve | Daoulagad | Le Dôme | 2 | 154 |
| 56 | Henbont | Emglev Bro an Oriant | Ti-karter Sant Jil | 1 | 124 |
| 56 | Langidig | Emglev Bro an Oriant | Mediaoueg | 2 | 167 |
| 56 | Karnag | Daoulagad | Kreizenn Terrake | 2 | 119 |
| 56 | Gwidel | Emglev Bro an Oriant | L'Estran | 1 | 33 |
| 56 | Henbont | Emglev Bro an Oriant | Er skol | 1 | 29 |
| 56 | Kistreberzh | Daoulagad | Iris Sinema | 1 | 29 |
| 56 | Ploue | Emglev Bro an Oriant | Sal ar Gouelioù | 1 | 40 |
| 56 | Ar Faoued | Daoulagad | Sinema Elle | 1 | 25 |
| 56 | Gourin | Daoulagad | Sinema Jeanne D'Arc | 5 | 88 |
| 56 | Logunec'h | Daoulagad | Sinema Le Club | 4 | 272 |
| 56 | Kaodan | Emglev Bro an Oriant | Er skol | 1 | 38 |
| 75 | Pariz | Daoulagad | Er skol | 1 | 12 |

196

10928

An eil troiad

Daou vloaz zo bremañ omp kroget gant ur c'hinnig nevez : un eil abadenn sinema evit ar skolioù dedennet da vont un eil gwech da sellet ouzh ur film-bevaat e brezhoneg. Ar filmoù kinniget a zo reoù bet advouezhiet pell zo, ha n'o deus ket profitet c'hoazh d'ar vugale skoliataet hiziv an deiz.

Memes doare hag an droiad pennañ e reomp o c'hinnig hon eus daou brogramm, **Loulou ha bleizi all** evit ar re vihan, **Enez Black Mor** evit ar re vras. Filmoù troiad 2006-2007 e oant bet c'hoazh.



Evit ar c'helc'hiadoù 1 & 2:

Loulou ha bleizi all

Filmoù-bevaat / Frañs / 40 mun

Teir istor vihan o kontañ istorioù bleiz : reoù jentil, reoù drouk, penaos e c'hellomp tresañ al loen-se, ar raksoñjoù foran diwar o fenn ...

Evit ar c'helc'hiad 3:

Enez Black Mor

Film-bevaat / Frañs / 2003 / 1 eurvezh 25

Seveniñ : Jean-François Laguionie



1803, war aodoù Kerne-Veur. Kid, ur minor a 15 vloaz, a zeu a-benn da achap kuit eus ti an emzivad e-lec'h ma oa bac'het 'giz ur galeour. Ne oar ket peseurt anv gwir zo anezhañ ha n'eo perc'henn war tra nemet ur gartenn. War ar gartenn, un enezenn, e-lec'h ma vefe un teñzor. E-barzh levr Black Mor e oa ar gartenn, ur morlaer brudet e plijfe kement da Gid bezañ heñvel outañ. Asambles gant daou beñseour, Mac Gregor hag Ar Fisel, e tec'h kuit Kid war lestr ar warded-aod, war roud e enezenn hag e deñzor, en tu all d'ar meurvor Atlantel.

Bep bloaz e kinnigomp d'an emglevioù-bro kemer perzh ganeomp d'an eil troiad-mañ. Ne c'hellont ket gouestlañ amzer ouzhpenn evit aozañ abadennoù ouzhpenn.

P'hon oa kinniget an eil troiad evit ar wech kentañ warlene, profitet hon oa deus ar fed e oa ur servij keodedel gant Daoulagad Breizh evit arnodañ ar raktres-se gant ar skolioù a labouromp gante war-eeun. N'hon oa ket amzer ouzhpenn da genderc'hel gant ar raktres ar bloaz-mañ. Kinniget hon eus ar filmoù d'ar skolioù, hag ar re zedennet hepken a zo deuet davedomp evit aozañ an traoù asambles. Ne c'hellomp ket kas amzer ouzhpenn da gendrec'hiñ skolioù all. Ul labour leun amzer vije dav kaout evit heuliañ ha donaat ar c'hinnig-mañ.

An arvesterien :

650 mont e-barzh (+23)

364 mont e-barzh evit Loulou ha bleizi all
286 mont e-barzh evit Enez Black Mor

18 skol-vamm ha kentañ-derez (+1)

22 abadenn-skol (+1)

11 eus Loulou ha bleizi all (=)

11 eus Enez Black Mor (+1)